



## GUERZ ILIS NEVEZ SANT IANN-TROLIMON


## DISKAN



Ni bugale le Kris ten a Vreiz hi ris a ro d'oc'h



hon ilis. Sant Iann, Ka ret hoc'h bet gant



hor Zalver; C'hui zo pro fet, c'hui zo mer. zo.

1.

E-touez bugale ar merc'het  
Biskoaz nikun n'euz bet kavet  
A ve brasoc'h eget Sant-Iann;  
Jezuz hen lavar he-unan.

2.

Iaouankik c'hoaz el lec'hiou gouez  
Hoc'h bet kaset gant ann Elez, — Sant Iann —  
Pell diouz ann dud, tost da Zoue;  
C'hui jomaz pur, korf hag ene.

## 3.

Na rust eo bet he binijen,  
 Kroc'hen kanval enn he gerc'hen ;  
 Biskoaz na guin, na tamm bara :  
 Griziou c'hoero evit beva.

## 4.

Dre nerz ho mouez, eil Eliaz,  
 Ann dezert oll a dregernaz, — Sant Iann, —  
 Kals pec'herien deuz d'ar Jourdin  
 O skei gant keuz var ho feultrin.

## 5.

Setu Jezuz, salver ar bed,  
 O tont da veza badezet :  
 Enn eur grena, Iann vadezour  
 Var benn he vestr a skuill ann dour.

## 6.

Ma krenit dirak mestr ar bed,  
 Dirak ann dud ne grenit ket, — Sant Iann, —  
 Tavit, tavit, tud digaloun,  
 Ar profet braz n'oar ket kaout aoun.

« Selaou , Herodez , te ra fall  
 « Derc'hel ganez pried eunn all ;  
 « Varnhot , varnhi , hag eb dale  
 « E pouezo dourn justiz Doue. »

Eur c'hreg gant he merc'h danserez  
 A reaz deoc'h hu koll ho puez, — Sant Iann, —  
 Malloz d'ann danz ha d'ar visou  
 Goad hag ifern ouz ho zeuliou !

He benn santel zo digaset  
 Var eur plat e-kreiz ar banket :  
 Sell ouz penn Iann , Herodez kriz ,  
 Ar penn-ze a veli noz-deiz !

Mervel zo berr , dir ar c'hleze  
 D'ar merzer eo alc'houez ann Ee ,  
 Na c'hui zo kaer e lez hon Tad ,  
 Badezour badezet er goad !

## 11.

Skullit bennoz var bep hini  
 A zikouraz sevel ho ti, — Sant Iann, —  
 Enn ho buez, var ho maro  
 Kemerit soursi anezho.

## 12.

Ma zeo dalc'het er Purkator  
 Ann hini zo bet hor pastor, — Sant Iann, —  
 Pa reaz kement 'vit hoc'h iliz,  
 Enn Envou roit dezhan lojeiz.

*H. Guillou*

